

Itroun Varia 'r Folgoat, kurunet

TOUN : *Santez Mari, Mam Doue.*

Itroun Varia 'r Folgoat,
 Evit ho saludi,
 Tud an Arvor, an Argoat,
 A zired gant dudi ;
 Eur gurunen lugernuz
 A lakear var ho tâl,
 Hag eur c'helou ken eüruz
 A ra d'heomp holl tridal.

DISKAN.

Santez Mari, Mamm Jezuz,
 Hag hor Mamm venniget,
 Mil bennoz d'an deiz eüruz
 M'ho kuelomp kurunet ;
 Brema petra da c'hortoz
 Ha petra da c'houlen
 Nemet c'hoaz, e'r Baradoz,
 Gaeled ho kurunen.

Ia, Guerc'hez, holl e tridomp ;
 Ha penaoz ne rafemp ?
 C'houi zo eur Vamm evidomp,
 Biken n'ho tilezfemp ;
 Ouz Breiz-Izel pa zellit,
 A pep tu tro var dro
 Sklear hag anat e velit
 Oc'h Rouanez hor bro.

Ama guech all e veve
 Eur paour, berr a spered ;
 Goude poania, ne zeske
 Netra, koulz lavared ;

Daou c'her : « *Ave Maria* »
Setu he holl beden ;
Mez n'eane d'ho c'hana
Divar skourr he vezen.

Var he vez, eul lilien,
Eun deiz, zo diouanet,
Hag e'n aour, var bep dellien,
Lizerennou skrifet ;
Peden vad ar jervicher,
Ken douget d'ho meuli,
Ho poa moulet, Mamm dener,
Var bleun guen all lili.

Goude beza ho pedet,
Noz deiz, e'n he lochen,
Foll ar c'hoat hen deuz roet
He hano d'an dachen ;
Hag, e leac'h ar bod lili,
Hirio zeuz var he vez
Eur japel gaër, hag e' n-hi
C'houi a zo Patrounez.

Hon tud koz, gant ho c'hizel,
Ho deuz dantelezet
Mein galet an ti santel
Zo d'heoc'h ama savet ;
Ha, da guzed blounsadur
Morzoliou digristen,
Ni d'hon tro, gant plijadur,
A brof hon aluzen.

Ouspenn, e'n hor parreziou,
Ho poltred a gavomp,
Hag, e'n hon tiegeziou,
Bian ha braz ho pedomp ;
E'n distro (burzud eüruz !)
Ni vel, a zioc'h hor penn,
Astennet ho preac'h nerzuz
D'hon harpa, d'hon difenn.

Her goùd a rit, hor buez-ni
A zo poaniuz meurbet ;
D'al labour, heb damanti,
Ni rank staga beppred ;

Ha goude c'houezi bemdez
Da c'hounid hor bevanz
Ne jomm ganheomp ken danvez
Nemet hon Esperanz.

Kalz ho deuz brasoc'h madou,
Kaerroc'h deskadurez ;
Ni hon deuz iez hon tadou,
Ho feiz, ho c'harantez ;
Ni a gar, e Breiz-Izel,
Hor Brezounek, hor feiz
Koulmet ho daou, Mamm zantel,
Gant hoc'h hano, e kreiz.

C'houi her goar, ho kurunen
A zéu a berz ar Pab ;
Hen eo tad ar gristenien,
Hen eo Vikel ho Mab ;—
Ni n'hallomp nemet pedi,
Hor peden zo dister ;
Pa zeo nerzuz hoc'h hini,
Harpit Kador Sant Per.

Bennoz d'hon Eskob nevez
Hen deuz ho kurunet ;
D'hezan ha d'heomp-ni, Guerc'hez,
Roit ho skoazel beppred ;
Ha pa zeuio ar mare
Da vond da velloc'h bro,
Evit paea d'heomp ho tle,
Hor c'hurunit d'ho tro.

Evit kimiada

Brema, Guerc'hez venniget,
Ni guita ho tachen,
Gant esper mad eo skuillet
Ho kras e'n hor c'herc'hen ;
Skrifit doun hon hanoiu
E'n ho kaloun dener
Hag, e kreiz hon trubulliou,
Bezit hon eil Salver.

Euz hor c'hostez e talc'himp
Sounj euz hor Rouanez ;
D'hezi, keit ha ma vevimp,
Ni zougo karantez,
Evit ma chommimp ato
E renk he bugale,
D'hè heul, dre 'n hent ma karo,
Ni boanio da vale.

Amjest braz eo an amzer,
Ar stourmad a zo kriz ;
Brezel a rear d'hor Zalver,
D'he lezen, d'he Iliz ;
Mez, pell da zizesperi,
Sùr omp, ni c'hounezo ;
Hon dourn zo e dourn Mari :
Netra n'hon diskaro.

Respount ar Verchez

Kleved a rân ho peden,
Bugale Breiz-Izel ;
Ia, rust eo ar venoden,
Ia, tenn eo ar brezel ;
Mez na gollit ket fizianz :
Dourn Doue ar c'hreva,
Ha lagad he Brovidanz
Zo var-n-oc'h e para.

Euz va zu, Breiziz fidel,
Ha n'hen dizounjit ket,
Me roio d'heoc'h va skoazel
Keit ha ma viot e'r bed ;
Ha, pa guitaot ho trañnien,
Me c'hoaz, ouz ho kortoz,
A vo, gant ho kurunen,
Var dreujou 'r Baradoz.

IMPRIMATUR :

Quimper, le 16 aout 1888.

SERRÉ, Vicaire-général.

*par M^{re} Quéré,
Curé de Châteaulin*